

Kanaouen an Otrou BAIL

VAR DON : Soubenn al leaz.

Petra 'zo nevez er vro-ma
Gant an depute 'zo brema ?
Hervez a glevan, ne renoz
Ar paour-kez den na de na noz !

Dre ma 'zeu tost ar votadek,
Ema sul-bemde o redek...
N'e ket, 'michans, da chassal...
Nan, moueziou emma o kestal.

Mes, kaer hen deuz, 'vel Boudedeo,
Bea bemde o foueta bro,
Kaer hen deuz mont, kaer hen deuz dont,
An tol-ma ne gav ket he gont.

Perag, an tol-ma, dre vuzud,
Enep d'ehan e sav an dud ?...
D'ar fin ez 'int deut da gompren
Hen doa ho zromplet beteg-hen.

Pa 've tostik ar voterez,
Ar Bail d'an dud divar ar mez,
D'ar martolod, d'ar micherour
A voa dibuna komzou flour.

Mes er Gambr, du-ze, keit all 'zo,
Petra 'n euz gret 'vid mad ar vro ?
Goall-ziez e ve d'omp laret,
Rag... hen he-unan ne voar ket.

C'hoant hen deffe euz hor c'halon
Diframma 'guir Religion,
Difenn ouz'omp komz brezonek
Ma nac'himp hor feiz e gallek.

Kounnaret holl evel eur bleiz
E teu d'ober brezel d'hor feiz,
D'ober brezel d'hor Seurezed
N'ho deuz gret nemet vad bepred.

Laret a ra an treitour fall :
« Hiviziken, c'houi vo tud all,
Er skoliou nevez c'houi 'zesko
Troï kein da Zoue ha d'ar vro. »

D'an traon an trubard milliget,
Ha liberte d'hor Seurezed,
'Vit ma teskint d'hor bugale
Karet ar vro, karet Doue !...

Perag ama hag a-hont klemmou,
Perag kement a hirvoudou ;
Petra 'zo 'nevez en hor bro
Mar d'eo an holl trist tro-var-dro ?

Ar Bail, er gear hag e Pariz,
Dalc'hammad 'zo enep an Iliz ;
Mes hen anzao ne raï biken,
Ar c'hontrol-beo a lar zoken.

Eur pennad 'zo hen deuz merket
Var eun tamm leor ganthan skrivet :
« Ma rer brezel d'ar veleien,
Me 'vo n'ho c'hichen d'ho difenn. »

Pa hen deuz skrivet kement all,
Ar Bail 'voa en imour farsal ;
Ha den ebet, me a gav d'in,
Ne gred e komze divadin.

« Ma rer brezel d'ar veleien,
'Vin kaet, eme'han, d'ho difenn... »
Oh ! ia, eun difenner dispar,
Evel al louarn 'vit ar yar !

« Me, eme'han, zo a galon
A-du gant ar religion... »
Oh ! ia, evel emma marvad
Ar bleiz a-du gant an danyad !

Daoust hag ar Bail a gav d'ehan
Eo deut sot-magn tud ar vro-man,
Hag int prest da lonka gevier
Brassoc'h eget touriou Kemper !

Piou a gredo, en hor bro Breiz,
E zeo hanter-noz da greiz-deiz ?
Ha be ho peuz guelek biskoaz
Eun neiz logod e skouarn eur c'haz ?

Amzer 'zo bet, hen doa ar vrud,
Da ober aoun da galz a dud,
Mes breman an elektourien,
Diraz'han' gred sevel ho fenn.

N'euz forz pelec'h ez er brema,
Dalc'hammad e klever memez tra :
« Ar veich-ma, 'lar kazi an holl,
Ar Bail a zo sur da goll. »

Varlerc'h de an eleksion,
De ken skrijuz 'vit he galon,
Ar Bail vo lezet e Kemper
Da c'hlaouri var he baper.

Hennez e vo eun devez kaon
'Vit an den-ze tolet d'an traon ;
Mes an dud vad, karget a joa,
Holl a gano : *Alleluia*.

Eur C'hernevot.